



## MERC'HED LOKENOLE



Merc'hedou Lokenole a zo merc'hed a stad  
Na brizont ket da zansal nemed gant potred vad.

Merc'hedou Lokenole ac'h a d'ar baladen,  
Diarc'hen, divouchouer, koeff abed war o fenn.

Merc'hedou Lokenole o devez prometet  
Monet en pelerinach da Zant-Yan beniget.

Dre c'hras an Aotrou Doue da Zant-Yan n'int ket et  
Rak ebarz e Plougasnou ez int bet diskeennet ;

Ar person a lavare d'ar zal en ofern-bred :  
— Diwallit merc'hed yaouank gant aon vefec'h tromplet

Diwallit merc'hed yaouank gant aon vefec'h tromplet  
Gant ar c'habiten Lablond hag e vartoloded.



## — 7 —

Ar merc'hed a respontas eus a draon an iliz :  
— Prezegit, aotro person, ni a rañs hor giz !

E oa ket peur-lavaret, na mad ar gouspero i,  
Ne oa ar merc'hed yaouank er gear a Blougasnou.

Ebarz ti Mari Beron ez int bet diskennet  
O, ya, dre ma oa gantê yalc'hou martoloded...

Ar merc'hedou a drinke hag a lipe o beg  
Hag ar warzed a gane, a ganne en galleg.

Hag ar warzed a gane, a gane en gallek,  
Hag ar merc'hed a c'hoarze dre na intentent ket !

Nemed eur dortez vihan deus ar vourk Karantek,  
Honnez oa bet er gouent o tiski ar gallek,

Honnez oa bet er gouent o tiski ar galleg,  
Hag a bede mil malloz war ar vartoloded.

Ar warsed a lavare, seder o daoulagad,  
Da merc'hed Lokenole, araok dont d'o c'hwitad :

— Mar vefemp ni intanvien, gras d'emp na vefemp ket,  
Ni a zeñs c'hoaz eur vech, c'hoaz eur wech d'o kwelet...

Hag a zigaso d'oc'h-c'houi, neuze eur chapeled,  
Ha gwalemou arc'hant gwenn d'ho kamaradezed.

Merc'hedou Lokenote, 'n eur ouela 'lavare  
Da Lablond ar c'habiter : -- Ni hor bo keuz d'it-te...



-- 8 --

Kenavo dit-te, Lablond, o ya pa m'out o vent,  
Ni garje a greiz kalon e vijes c'hoaz o tout !

Merc'hedou Lokenole a ouele war ar c'haè  
Da Lablond ar c'habiten... Allaz ! partiet è !

Lablond a zo partiet ha et emaez ar vro,  
Ha merc'hed Lokenole a c'hortoz e zistro.

Me gred, da Lokenole, na zistroo biken,  
Kaer o devez ar merc'hed kavout poan hag anken.

Kaer o devez ar merc'hed gouela d'ezan dourek,  
Ne zeuio ket da gana d'ezè zoniou gallek.

Rak-se 'ta merc'hed yaouank, a galon me ho ped,  
Ankounac'hañt Lablond hag e vartoloded.

Ankounac'hañt Lablond hag e vartoloded,  
Ha bezit ive furoc'h en amzer da zonet...

Ha bezit ive furoc'h en amzer da zonet,  
Furoc'h ma 'z hoc'h bet merc'hed en amzer dremenet...

